

UNVANIEZH AR GELENNERIEN VREZHONEG

ABADENN - VEUR

RENTAN - KONT

RENTAN - KONT

UR ugent bennak a izili zo deuet d'an ABADENN - VEUR, d'an 19 a viz Meurzh 1983, en ORIENT . Kement o doa skrivet pe pellgomzet evit en em zigarezin . Embannet eo bet pennadoù gant : " Le Télégramme de Brest " (21/3/83, embannadur ar Mor-Bihan), " Ouest-France " (22/3, pajenn ar Mor-Bihan) ha " La Liberté du Mor-Bihan " (22/3, pajenn An Orient) .

I.- AN OBEROU : abaoe krouidigezh an Unvaniezh, e Roazon, d'ar 26 a viz Mezheven 1982 . Pevar c'hraf zo bet displeget gant Tugdual KALVEZ, prezidant ; penaos e deus klasket ar Burev da c'hortoz :

- 1- frammañ ar c'hevredad ;
- 2- lakaat an Unvaniezh da vezañ anavezet ; ha
- 3- bezañ degemeret evel ur strollad sirius ;
- 4- labourat en un doare efedus evit difenn deskadurezh ar brezhoneg hag ar gelennerien vrezhoneg .

War pep poent eo aet an traoù war-raok, met e 7 miz klok labour hepken ne c'hell ket bezañ parfet o stad hag e vo da welaat anezho .

2.- AN ARGANT : gant Mark KERRAIN, teñzorer .

85 ezel o deus paeet o skodenn ; un nebeut tud all o deus kaset o fichenn ha disañje lakaat o chekenn ...

Skodennoù ha profoù = 3305 lur ; dispignoù = 1616 lur ; er c'hef = 1689 lur .

Frejoù sekretourva dreistholl zo bet (timbroù, goloioù-lizher, luc'hskridoù) peogwir n'eo ket bet digollet diouzh e frejoù-hent pe bellgomz tud ar Burev .

An daou rentañ-kont (oberoù + argant) zo bet votet : a-unvouezh an eil ; an hini kenta nemet mouezh un emvirour .

3.- ABADENN - VEUR DREISTORDINAL :

- 1- cheñchet hon eus anv hor strollad, deuet de vezañ goude-hen : Unvaniezh Ar Gelennerien Vrezhoneg = U.G.V. (a-unvouezh) ;
- 2- studiet hon eus statud ofisiel an Unvaniezh ha graet un nebeut kemmadennoù en destenn (poentoù 5 hag 8) . Votet eo bet a-unvouezh ivez .

4.- SKODENN 83 - 84 :

adalek miz Gwengolo e vo paet ar skodenn nevez a dalvezo evit bloavezh-skol 83-84; ezel oberiant = 40 lur d'an nebeutañ ; ezel madoberour = adalek 60 lur (votet a-unvouezh) .

5.- KANNADIG :

un nebeut izili o deus goulennet e vefe kaset dezho ur seurt kannadig bep daou viz war-dro . Embannet e vo neuze div follennad keleier, goulennoù, diskleriadurioù,... Goulenn a reomp gant an holl skrivañ deomp evit leuniañ ar " c'hannadig " gant ar pezh a blijfe deoc'h gouzout, embann, ober,...

6.- FRAMMADUR AR GEVREDIGEZH :

- Mat e vefe kaout burevioù bro, tri den enno, e-lec'h ma 'z eo posubl sevel anezho: Leon, Kerne, Gwened, Treger, korn Sant-Brieg, Sant-Malo, Roazon, Redon, Naoned, Pariz ha departamant ar Mayenne .
- Ar pezh a wank marteze ar muiañ, hervez izili zo, eo eskemm keleier da gentañ . Neuze o deus goulennet e vefe un den e pep Bro d'an nebeutañ karget da vodañ ar c'heleier ha da gas anezho d'un ezel eus ar Burev broadel, dre lizher pe dre bellgomz (ur rouedad pellgomz e vefe e-giz-se) .
- An daou ginnig a c'hellont kenglotañ . Lavarit deomp ar pezh a soñjit hag ar garg oc'h prest da gemer . Roll izili ho kornad a vo kaset deoc'h ma asantit buhezekaat an Unvaniezh ennañ .

7.- VOTADEG :

setu roll izili ar c'huzul-merañ zo bet mouezhiet : Anna Ar Beg, Beatris Jouin, Annaig Tranvaux ; Per Denez, Tugdual Kalvez, Mark Kerrain, Yann-Glaod Morvan, Job Rio ; an navet a vo dibabet gant ar c'huzul-merañ, hervez reolennoù ar statud (a-unvouezh) Bodet e vo ar re-mañ d'ar sadorn 23 a viz Ebrel, e Pondi, ma vo mouezhiet ar Burev .

8.- " SKOL OBER " :

kinnigoù teknikel zo bet graet evit kreñvaat ar skol dre lizher, a vo kaset da renerien " Skol Ober " o deus darempredoù gant Burev broadel an Unvaniezh .

9.- Kenlabour :

A- an abadennerien o deus hetet e vefe kenlabouret pe gwelaet hor c'henlabour gant Ar Falz, Bleun Brug, Skol Uhel Ar Vro, h.a. war hon tachennoù boutin : kaout darempredoù etre ar burevioù, eskemm menozioù, sevel teuliadoù, ober kinnigoù, manifestiñ asamblez,...

B- an Aotrou Alain PLENEL, rener C.R.D.P. Roazon, en deus kinniget deomp kenlabourat gant e velestradur . Divizet eo bet asantiñ . Beatris JOUIN ha Per DENEZ zo bet karget da studial ha gwelout penaos gant an Ao. PLENEL .

10.- MENNADOU :

A- Ur mennad a ginnige un doare zo da veizañ an deskadurezh dre vras zo bet nac'het . An abadennerien o deus kavet eo dav d'an Unvaniezh chom war dachenn resis difenn ar brezhoneg hag ar gelennerien vrezhoneg .

minima ... Ainsi, ... le minimum de 15 élèves ne peut constituer une condition nécessaire . "

Un dra all c'hoazh . E-touesk kinnigoù diwezhañ ar Rektor (I2/II/82) evit digeriñ klasoù divyezhek e kavomp ar resisadur-mañ a-zivout niver ar skolidi : " Elles pourront être créées s'il existe un minimum de 8 élèves sollicitant l'enseignement bilingue . Ce nombre, sans constituer une norme officielle, est celui qui est généralement admis pour le maintien d'une classe en diminution d'effectif en zone rurale " .

An holl bennadoù-mañ a ziskouez ez eus tu da zigor ur c'hlas gant eizh skoliad hepken .

En tu all d'an testennoù ez eus an doareoù d'ober .

Ma vefe ur gudenn gant rener ar skol pe gant ar melestradur e chom ez eo posubl d'ober e-giz ma vez graet e skolioù zo evit ar yezhoù dibabet gant re nebeut a vugale (al latin, an italianeg, ar ruseg, h.a.) : lakaat e penn kentañ ar bloaz anv daou pe dri skoliad ouzhpenn ar re enskrivet, evit ma vefe a-walc'h, ha goude-se diskleriañ, div pe teir sizhun diwezhatoc'h, ne fell ket d'ar re-se kendalc'h gant ar brezhoneg . Ur wech lakaat an traoù en o flas da vat ne vez ket diskaret anezho war-lerc'h . Ur bloavezh ' vez gounezet e-giz-se d'an nebeutañ !

T.K.

--§--

ROLL AN TESTENNOU OFISIEL

e-keñver deskadurezh
ar brezhoneg

I.- TESTENNOU KOZH :

- Loi n° 51-46 du 11 Janvier 1951 : enseignement des langues et dialectes locaux .
- Circulaire n°66-361 du 24 Octobre 1966 : création de commissions académiques d'études régionales .
- Circulaire n°IV-69-90 du 17 Février 1969 : enseignement des langues et cultures régionales dans les classes des premier et second degrés .
- Circulaire n° 71-279 du 7 Septembre 1971 : idem .
- Circulaire n° 76-123 du 29 Mars 1976 : prise en compte dans l'enseignement des patrimoines culturels et linguistiques français .

2.- TESTENNOU A-VREMAN :

- Charte Culturelle de Bretagne, février 1978 (kaset d'ar skolioù gant Akademiezh Roazon d'an II a viz Meurzh 1980, dindan an"niverenn" : BLB/MLB/25) .
- Circulaire rectorale du 8 Septembre 1981 (Recteur: M. Paul Rollin) : enseignement de la langue bretonne .
- Circulaire ministérielle n°82-261, du 21 Juin 1982 : l'enseignement des cultures et langues régionales dans le service public de l'Education Nationale (M.Savary) .
- Circulaire rectorale du 12 Juillet 1982 (DIPOS/PR/MM N° 33710) : enseignement des cultures et langues régionales (recteur P. Rollin) .